

# Kantik Sant Stephan

PATROUN PARREZ PLOUEZOC'H

TON : *Euruz an hini...*

DISKAN

Euz a Blouezoc'h, patroun gallouduz  
Sant Stephan bepret bezit soursiuz. } *bis*

En deiz ho pardoun, ô kenta merzer,  
Kassit hor pedenn beteg hor Zalver. } *bis*

Ar Spered-Santel, dre levr sant Lukas,  
A ro d'ehoc'h honor ha meuleudi braz.

Er bed-man ganeoc'h ar greun mad hadet  
'Vit ar Baradoz kant o deuz roet.

Evel eur rozen, oa bras ho kenet,  
Guen-kan ho kaloun ha lem ho speret.

Evel eur bugel varzu he vam a dro,  
Eaz ar Skritur Sakr, c'hui en em stago.

Ann oll vertuziou, fleur kaër an Envou,  
A garg oc'h ene, evel bokedou.

Gant an Ebestel, Avielar choazet,  
An dud ezommek ennoc'h oe fiziet.

Pebes madelez evit an dud paour !  
Bep seurt meuleudi 'roent d'ho kaloun aour.

Egiz flammou tan ho komzou nerzuz,  
Re ' anavezout ha karet Jezuz.

Jezuz, emedoc'h, eo Zalver ar bed,  
Hen ar Mesias d'an dud prometet.

Ar gliz hag an heol en poent o koueza,  
'Ra buhan d'an had sevel ha poulza.

Dre ho torn ivez, bep seurt burzudou  
Roe nerz dispar d'ho prezegennou.

Oc'h enebourien, dre avi dallet,  
Gant mein, tra spountuz ! o deuz ho lazet.

E kreiz ho poaniou, 'vit ho kennerza,  
Jezuz en he c'hloar a deue da bara.

Na kaëra komzou lavaret neuze :

« Jezuz, mestr divin, resevit va ene. »

Evel hor Zalver, euz a greiz kaloun,  
D'hoc'h enebourien, c'hui a roë pardoun.

Dre nerz ho pedenn, Saul en Paul chenchet,  
Da Zoue deuz roet kalz a bayanet.

Breman enn Envou, skeduz da velet,  
'Vel kenta merzer, huel oc'h savet.

Da dud Plouezoc'h, holl ho pugale,  
Roit iec'hed ar c'horf, iec'hed an ene.

Var al labourer, en he bark kroumet,  
Skuillit ho pennoz, patrour benniget.

Mirit, ni ho ped, kreiz ar gual amzer,  
Ar martolod paour, en he vag dister.

Da vro Breiz-Izel, d'ar gear digasset  
An dud a garomp, kerent, mignounet.

Ni c'houlenn dreist oll, chom bepred fidel  
Da Zoue, d'he Iliz, d'ho lezenn santel.

Pedenn hag offerenn, ha zakramanchou  
Ra jomo en penn on oll oberou.

A vir garantez kargit hor c'haloun  
Evit hon nesa, evit an anaoun.

Euz Kastel an Taro, ar mein a uzo,  
Mez aman dreizoc'h, ar feiz ra jomo.

Da Zoue hor buez, evel hon tud koz,  
Evit kaout lojeiz en he Varadoz.

Lakit Tregeriz varzu hent an Ee  
'Vel kristenien Leon ha re bro Kerne.

Da dud ar Goure, da dud an Arvor  
Enn Envou, mar plij, dalc'hit dor digor.

Y. Penru

~~~~~  
I M P R I M A T U R

Quimper, 8 décembre 1902.

F. CORRIGOU,  
Vicaire général.